

Gouel Nedeleg 2025

Oferenn hanternoz

"Gloar da Zoue e barr an neñvoù, ha peoc'h war an douar d'an dud a blij dezhañ."

+

Breudeur ha C'hoarezed ker,

Ganedigezh Mab Doue eo ar c'hentañ euz Epifanioù an Aotrou, ar c'hentañ diskouez eus a Zoue. Ret eo deomp kompren petra a dalv kement-se, rak d'ar mare ma oa Jezuz o vont da vezañ ganet, e oa dic'hortoz, n'eo ket hepken en em ziskouezfe Doue e-unan, met muioc'h c'hoazh, e teufe da vezañ un den. Dre vras e vez diforc'het meur a Epifani eus an Aotrou : e c'hanedigezh, e zikouez d'ar bastored ha d'ar Maged, e ziskouez en Templ, e vadiziant, hag an eured Kana, a zo ar burzhud kentañ graet gant Jezuz. Ganedigezh Mab Doue a zo eta kentañ Epifani an Aotrou. Setu perak dre hengoun e veze lidet Nedeleg d'ar 6 a viz Genver, liammet ouzh gouel an Epifani. Miret eo bet an hengoun-se er bed ortodoks. Er bed latin, gouel ganedigezh an Aotrou a voe degaset war-raok gant un nebeud devezhioù evit klotañ gant an heol-goañv, gant ar pal kristenekaet ar relijion geltiek a oa anezhañ en al lodenn-se eus ar c'hevandir. Dre ma'z eo Mab Doue ar gwir sklerijenn hag a sklerijenn pep den, evel ma tispieg deomp lennadenn an Aviel en oferenn deiz Nedeleg, an Iliz en doa kavet dereat diskouez e teuas Mab Doue e-kreiz an noz teñvalañ evit degas deomp ar sklerijenn hag a ya, adalek an heol-goañv, da greskiñ hepken. Er bed latin, Nedeleg a veze neuze lidet d'ar 25 a viz Kerzu. Mes d'ar mare-ze, ar Gouel kristen brasañ a chome Pask. Padout a rafe betek an XIIIvet kantved. Goude-se en deus gouel Nedeleg gounezet talvoudegezh betek dont da vezañ an eil eus gouelioù bras ar Gristeniezh gant levezon sant Fransez a Asiz dreist-holl.

Fenoz e fellfe din sellout ganeoc'h ouzh perzhioù zo eus ar c'hentañ Epifani an Aotrou. An dra gentañ eo Doue a zo deuet war wel e stumm ur bugel. Hag a ziskouez uvelded Doue da gentañ-penn. Ar Verb, Komz Doue, a zeu da vezañ ur Bugel, In-fans e latin, da lavaret eo, an hini ne oar ket komz. Mont a ra an hollc'halloudek en ur c'horf hag en un natur bevannet, ha dibab a ra bezañ gouest da c'houzañv. Antreal a ra an eternel en amzer. An hini embannet gant an Aelez evel "ur Salver, ar C'hrist, an Aotrou," da lavaret eo, ar Mesiaz, a zeu war wel dindan stumm ur bugel nevez-ganet gourvezet en ur prezeb en ur c'hraou. Nedeleg a zegas da soñj deomp eus uvelded hon Doue, ne fell ket dezhan flastrañ ar mab den gant e hollgalloudez, mes dre en em lakaat ar bihanañ posupl.

Ur bugel zo c'hoazh unan bennak na c'hell ober netra e-unan, hag en deus ezhomm eus tud all evit kreskiñ ha bevañ. Doue en em laka da vezañ dizalc'h ; en em reiñ a ra hag en em lezel a ra etre daouarn an denezh. Ur bugel ne c'houlenn netra nemet bezañ digemeret ; ne c'hell ober netra e-unan. Da Nedeleg, Doue en em laka ar bihanañ posupl, an didrouzañ posupl, hag e sko war dor hor bed hag hor c'halonoù, en ur c'houlenn diganeomp e zigemer hag e zigemer en e di. Setu penaos e teu Doue en hon tiez : en ur c'houlenn hon degemer.

Ar skeudenn eus an Aviel hon eus klevet nevez zo a ziskouez un dra all tennet eus an Epifani gentañ-mañ eus an Aotrou : pep tra a zo simpl. Gwelet a reomp eeunded Doue o labourat. Mab Doue a zo o vont da c'henel tra ma'z eo Mari ha Jozef o sentiñ ouzh urzh impalaerel evit niveradiñ an dud. Un doare da lakaat an Israelited da lakaat en o fenn e oant sujet d'an Impalaeriezh roman. E-pad an amzer-melestradurel-se e vo ganet Mab Doue. Kenderc'hel a ra ar skeudenn en e eeunded : lec'h ebet da zegemer ar c'houblad yaouank, gant ar vesaerien, an dud-se a dremen an noz er-maez o tiwall ar chatal, o vezañ o azeulerien gentañ. Er skeudenn simpl-se a-benn ar fin e kej an dreistnatur gant an natur, gant ar gemennadenn a-

berzh an Aelez o pediñ an holl da vont da azeuliñ ar Bugel nevez-ganet. Setu perak, marteze Nedeleg ez a betek bouedenn kalon hor c'henvreudeur ?

Eeun eo ganedigezh Doue. An traoù luziet ne zeuont ket eus Doue, met eus an dud. Doue a dremen dre dargouezhiou politikel ha melestradurel, dre nac'hadennoù a bep seurt, met netra ne viro ouzh e labour da vezañ kaset da benn. Ha daoust eo hor bed hiziv luzietoc'h eget hini dec'h ? N'eo ket sur. Ar mab den ne chench ket. Klask a ra atav ar pinvidigezh, ar c'halloud, plijaduriou ar bep seurt hag e ra freuz ha reuz evit tizhout he bal. En trouz ifern-se, Doue a zeu betek ennomp en sioulder ! Netra ne viro ouzh Doue da zont betek ennomp en e eeunded.

Breudeur ha C'hoarezed, pebezh kelou mad ! Fenez, lakaomp a-gostez hor fallagriezh, ha degemeromp Doue a zeu betek ennomp en un doare simpl. C'hoant bras hon eus e vefe echu gant an emgannoù, e paouezfe ar brezelioù, ne vefe mui an dud didamall gouzañvet, hag e vefe trec'h ar wirionez hag ar justis. Evel-just, deomp-ni eo sevel ha klask ar peoc'h-se ; met dija ar pouezusañ eo da zegemer mad ar Mabig Jezus.

Ha fellout a rafe din echuiñ ar brederiadenn-mañ en nozvezh Nedeleg-mañ gant un dezverkus all eus an Epifani gentañ-mañ.

Petra dalv Nozvezh Nedeleg eo Doue a zeu davedomp en hon deñvalijenn. Re alies, gwelout a rit, c'hoant hon eus e vefe brav an traoù evit E zegouezh. Met n'eo ket evel-se. Dont a ra Doue d'hon c'havout en noz, pa vez an denvalijen en e tenvalañ. Anavezout a reomp ar frazenn-mañ eus an Arc'hael Gabriel da Vari : "N'eus netra dibosupl da Zoue."

En noz Nedeleg-mañ, e c'hellomp lavaret adarre : « Netra n'eo re deñval d'an Aotrou. »

Er c'hontrol, an deñvalijenn a c'halv ar sklêrijenn.

Fenez, lezomp ar sklerijenn doueel-se da dizhout hon c'halonoù, hor familhoù, hon darempredoù gloazet, gwallgaset, hor c'hevredigezh. Ur vammenn a frealzidigez hag a beoc'h e vo dija ar sklêrijenn doueel-se evit pep hini ac'hanomp en o c'hortoz trec'h ar sklêrijenn war teñvalijenn lidet da vare Pask. Nedeleg santel d'an holl ! Amen!

## Solennité de Noël 2025

### Messe de la Nuit

« Gloire à Dieu au plus haut des cieux, et paix sur la terre aux hommes, qu'il aime. »

+

Chers Frères et Sœurs,

La naissance du Fils de Dieu constitue la première des Épiphanies du Seigneur, la première manifestation, la première apparition de Dieu. Il faut bien se rendre compte de ce que cela signifie, car au moment où Jésus va naître, il est impensable non seulement que Dieu se donne à voir, mais encore plus, qu'Il se fasse homme. On distingue généralement plusieurs Épiphanies du Seigneur : sa naissance, sa manifestation aux bergers, aux Mages, sa présentation au Temple, son baptême, et les noces de Cana qui constituent le premier miracle opéré par Jésus. La naissance du Fils de Dieu est donc la première Épiphanie du Seigneur. C'est la raison pour laquelle traditionnellement la fête de Noël était fêtée au 6 Janvier associée à l'Épiphanie. Cette tradition s'est conservée dans le monde orthodoxe. Dans le monde latin, la fête de la naissance du Seigneur a été anticipée de quelques jours pour la faire correspondre au solstice d'hiver dans un but de christianisation de la religion celte qui existait dans cette partie du continent. Puisque le Fils de Dieu est la vraie lumière qui éclaire tout homme, comme nous le rappellera l'Évangile de la messe du jour de Noël, l'Église a jugé bon de montrer qu'au coeur de la nuit la plus profonde, le Fils de Dieu est venu nous apporter la lumière qui, à partir du solstice d'hiver, ne va faire que grandir. Dans le monde latin, Noël s'est donc trouvé fêté le 25 décembre. Mais à l'époque, la grande fête des Chrétiens demeurait Pâques. Il faudra attendre le XIIIe siècle, avec notamment l'influence de Saint François d'Assise, pour que la fête de Noël prenne de l'importance au point de devenir la deuxième des grandes fêtes de la chrétienté.

Je voudrais ce soir regarder avec vous quelques caractéristiques de cette première Épiphanie du Seigneur. Le premier élément que je reprends est que Dieu apparaît sous les traits d'un enfant. Ici se donne à voir en premier lieu toute l'humilité de Dieu. Le Verbe, celui qui est la Parole de Dieu, se fait Enfant, In-fans, c'est-à-dire celui qui ne sait pas parler. Celui qui est tout puissant entre dans un corps et une nature limitée. Celui qui est éternel entre dans le temps. Celui qui est impassible choisit de pouvoir souffrir. Celui qui est annoncé par les Anges comme « un Sauveur, le Christ, le Seigneur », c'est-à-dire le Messie, apparaît sous les traits d'un nouveau-né emmailloté et couché dans une mangeoire. Noël nous redit l'humilité profonde de Dieu qui ne veut pas rejoindre l'homme en l'écrasant de sa toute-puissance mais en se faisant le plus petit possible.

Un enfant est encore celui qui ne peut rien par lui-même, qui pour grandir et vivre a besoin des autres. Dieu se fait dépendant, il se remet et s'abandonne entre les mains des hommes. Un enfant ne demande qu'à être accueilli ; il ne peut rien de lui-même. À Noël, Dieu se fait le plus petit possible, le plus discret possible et il frappe à la porte de notre monde et de notre cœur, nous demandant de l'accueillir et de le prendre chez lui. Voilà comment Dieu entre chez nous : en sollicitant notre hospitalité.

La scène de l'Évangile que nous venons d'entendre nous révèle une autre caractéristique de cette première Épiphanie du Seigneur : tout est simple. Nous voyons la simplicité de Dieu à l'œuvre. Le Fils de Dieu va naître alors que Marie et Joseph se conforment à l'ordre impérial du recensement. Ce recensement était une manière de rappeler aux Israélites qu'ils dépendaient de l'empire romain. C'est au cours de cette formalité administrative que le Fils de Dieu va naître. La scène continue dans sa simplicité : pas de place

pour accueillir le jeune couple avec l'enfant à naître, avec pour premiers adorateurs les bergers, ces gens qui passent la nuit dehors à garder les troupeaux. Dans cette scène finalement toute simple, le surnaturel rejoint le naturel avec le message des Anges qui invite à aller adorer l'Enfant qui vient de naître. Peut-être est-ce un des aspects de cette fête de Noël qui touche autant nos contemporains ? La naissance de Dieu est simple. Les complexités ne viennent pas de Dieu, mais des hommes. Dieu se fraie un chemin au milieu des aléas politiques et administratifs, au milieu des refus, mais rien n'empêche son œuvre de s'accomplir.

Notre monde aujourd'hui est-il plus compliqué que celui d'hier ? Rien n'est moins sûr. Hier comme aujourd'hui, ce sont les hommes qui sont compliqués. Les hommes qui, par leurs calculs, la recherche de leurs propres intérêts, leurs magouilles et leur complicité, tentent d'organiser les choses à leur sens et d'orienter le monde tel qu'ils le voient et qu'ils le veulent. Face à tous ces stratagèmes, Dieu vient à nous dans la plus grande simplicité, se frayant un chemin au milieu de toutes ces complexités et rien ne l'empêche de venir.

Frères et Sœurs, quelle bonne nouvelle ! Combien de situations sont confuses, compliquées aujourd'hui, que cela soit dans notre propre cœur où parfois coexistent, voire s'opposent, des pensées et des intérêts différents, que cela soit dans nos familles, dans nos paroisses, dans notre société, notre monde. Combien d'intérêts particuliers se rencontrent et s'entrechoquent les uns aux autres. Et rien n'empêchera Dieu de venir à nous et en nous dans sa simplicité. Ce soir, mettons de côté, abandonnons les calculs, la recherche des intérêts et accueillons Dieu qui vient à nous simplement. On voudrait tellement que les conflits s'arrêtent, que les guerres cessent, que les innocents ne soient plus victimes, que la vérité et la justice triomphent. Bien sûr, il nous appartient de construire et de rechercher cette paix ; mais déjà accueillons Dieu qui vient à nous avec simplicité dans ces situations de troubles, de conflits, de ténèbres.

Et je voudrais terminer cette méditation en cette nuit de Noël par une dernière caractéristique de cette première Épiphanie du Seigneur. Ce qui nous est dit dans cette nuit de Noël, c'est que Dieu nous rejoint dans nos ténèbres. Trop souvent voyez-vous, nous souhaitons que les choses soient le mieux possible pour que Dieu vienne à nous. Mais il n'en est pas ainsi. Dieu vient à nous dans la nuit, au moment où les ténèbres sont les plus épaisses. Nous connaissons cette phrase de l'Archange Gabriel à Marie : « Rien n'est impossible à Dieu ». En cette nuit de Noël nous pouvons redire : « Rien n'est trop ténébreux pour Dieu ». Au contraire, les ténèbres appellent la lumière. Ce soir, laissons cette lumière divine rejoindre nos cœurs, nos familles, nos relations blessées, abîmées, notre société, nous rejoindre. Cette lumière divine sera déjà source de consolation et de paix pour chacun de nous en attendant la victoire de la lumière sur les ténèbres que nous fêterons à Pâques. Belle et Sainte fête de Noël à chacun d'entre vous ! Amen !